

Kantik Zant Yann Badezour.

War don : *Na neuz ket en Breiz.*

DISKAN :

Jezuz e-unan, Jezuz hen lavar :
Zant Yann Badezour na neuz ket e bar (bis).

An El Gabriel da Zakariaz
A annons eur mab, a vo zantel braz.

Doue e-unan, dre c'hinou an El,
A verk e vo Yann hano ar bugel.

Dre eur c'hraas dispar, 'rog ma teu er bed,
E ine dija zo dibec'h ha net.

Gant Doue oa bet choazet a viskoaz
Evit prepari hent ar Messiaz.

D'e ziskibien ker e laro eun de,
'N eur diskouei Jezuz : « Setu Oan Doue ! »

E gomzou, e skouer d'an holl Juzevien
A disko dalc'hmad ober pinijen.

Ne baouez da skoi war ar goal dechou,
A strink en ifern kalz a ineou.

Kalonek e stourm 'vit ar burete,
Prest 'vit he difen da goll e vue.

Herve bolante eur plac'h dirollet,
Dre urz Herodez ec'h e dibennet.

O Merzer zantel, zikour, ni ho ped,
Ma vo hon bue fur ha pur bepred.

Plijet hon diwall dre ho pedennou,
A enep ar bed hag e zanjeriou.

Pedet, o Zant Yann, evit Breiz-Izel,
Ha harzet enghi ar fe da vervel.